

CHANSON

Composet var sujet an Dansou hac an Tennadegou.

Var don : *Chanson ar C'hafe.*

Me ho ped, habitantet, tud a bep qualite,
Da dont da selaou eur chanson composet a neve,
A zo gret gant daou zoudard arruet er c'hontre,
En ho brasan plijadur, pa oa fin d'ho c'honje.

O tremen bourg o farouz ez int n'em arretet,
O velet an tiez neve a oa ennan savet.
Gant an numero trizec pa ma renquet quitat,
Ne voa nemert pevar zi ha cabanen ma zad.

Breman zo ouспен daouzec demeus a diez braz,
Ornet gant eur bod illieo, eun anseign hac eun tas ;
An dud a binvidigez a fournis an arhant
D'ho derhel en ton huel ha da bean patant.

Nemeuz netra da laret demeus an hostijen,
A re a zo tud honest a voar delhen ho fen ;
Monet a ra cals a dud demeus a galite
Da di an debiterrien gant o ziez neve.

Lezel 'ran an hotellou, na fel quet din avans,
Rac ar c'homerezet zo neceser en Frans ;
Lezomp an tiez neve en ho prosperite,
Ma vo tout pep a hini a drugere Doue.

Bea zo menajerien hac a zalc'h tenno mad
Da vont da zicour an hostis alies da chareat,
Da fournis ar matierou evit sevel an ty ;
Goude en eur revennou ho bugale a hi.

Pa deu an noz da asten e tosta da volarje,
An hostijen neuze a bren cartou neve,
Evit ober eur barti da n'em divertissa,
Quercouls a re dimeet vel a re iaouanquan.

Divar an triconiou e saver an arhant
Evit ober eur regal, da bep hini e c'hoant ;
An hostis, an hostizes a ielo er barti,
Nemert pa vo danjer deus ar jandarmiri.

En eur zal tapisset, hac alies clanen
Evit ar brosperte, cazi a zioc'h o fen ;
An hostis a remerquo e classenou coant ;
Gonit a ra ar barti, joauz ha triumphant.

Merhet an amezegez, en coulz ar gouspero,
A chom en hostaliri da c'hoari domino ;
An alies merquou a baeo ar c'hafe,
Da n'hini digoueo ar sort, henez a blijo de.

Tost d'an hostaliri, ma ve tam franquisen,
Evo formet eun dennadec da denna var ar guen ;
Ar sonner a vo ivez da zon eun obaden,
Ar voutail hac ar veren a vo en e guichen.

Peurvuan an danserien ve sujet d'ar sehet,
Hac a ve guerzet deze demeus ar guin trinquet ;
An hostis a brofito demeus an dud iaouanc,
Ha c'houi tado a mestrou a fournis an arhant.

Echu an obaden, eru da defalad,
E teu an dabatieren da gommans hardiad ;
Muoc'h a ia d'an davarn evit n'a ia d'ar guer
Quen a zon cloc'h naveur pe ouспен m'ar galler.

Leveret din, tud ancien, petra a c'honeet,
Pa vez bet o tud iaouanc d'ar zul en dennadec ;
Pa pe ezom aneze d'ar lun deus ar beure
Ven carguet a c'hoant cousquet cazi bete creis-de.

Pa vezint bet er gousperou, gant moderation,
E vezo dingn o speret a tranquil o c'halon ;
C'houi a velo aneze ebars en assurans ;
Digant Doue ez eo e teu ar Brovidans.

Eur beajour o tremen en devez goulennet,
Digant eun den o c'harat er parc gant e guezec :
Leverit din, ma mignon, pe lec'h e vin lojet,
Elec'h ma zo tud honest, ma na vin quet laeret?

An den-man, dre garante, n'em aretaz ganta :
Rèzon o c'heuz, ma mignon, me lavar dec'h brema ;
Eur goaz coz a zo aze a dalc'h hostiliri,
Ne neuz nemert tud honest o tarempret e di.

Bea zo eun hostizes zo muoc'h exijant,
O receo mad, ma mignon, ha guelloc'h ho arhant,
Pa po gret eun tam scoden aroc mont da gousquet,
Renqfet paea ractal evel ma tifunfet.

Ar paour quez den iaouanq a scrab coste e ben ;
N'euz quet ganin a arhant da bea ma scoden,
Mes c'houi a rei eur billet, me zino anezan,
Ha quenta ma ellin me deuio d'o paeon.

Chetu aman da gommans, ma montr a ma chaden,
Ma mezelour godel ha pevar scoet ouспен.
— C'houi zo eun den a verit, o faeson a blig din ;
Ne deus fortun er barous a ielo queit a c'houi.

Tao din gant gourc'hemmenou ar mevier obstinet
Flèria a ra e c'henou divar ar guin trinquet ;
Pa erruont en ilis evel tud insolant,
Na bad den n'he guichen gant c'hoez ar guin-ardant.

Gand eur chiquenniad butun n'en devez mez ebet,
Bossot en corn e c'hinou epad an ofern bred,
Suffis e vo pa c'hai voar eur c'hlin hepquen,
Evit ma nevo plas da granchat, hep en ober var den.

Dec'h diveza, emezi, a voa lavaret din,
Ve ar guin hac ar butun a ra boulers en ti ;
Asur on a guemen ma, merquet e var ar roll,
Ne man quet var an doar an hini blij d'an oll.

Guir eo a soufr an hostis gant ar ravoderrien,
Tud noajet ha dientet, casi collet o fen,
Ha pa ve èt o arhant e zeont en coler,
Evit consoli Lucifer pa erruont er guer.

Er finvezo diveza, c'houi na sonjet quet :
Tud a bep condition, deus ar c'haera disquet,
A lavar eo eur malheur a oal deut er c'hanton,
Ispisial ar merc'het a oal condition.

Clevet e c'heus alies comz demeus ar prodig,
Exempl da veur a hini, da baour ha pinvidig ;
Eman voa eun den iaouanc, eun den a galite,
Goneet gant ar boisson, meur a hini a ve.

Respont a rai an hostis, me ne n'on quet quiriec,
Goulen a ran diouzoc'h petra zo d'ho souet,
Pera dont d'am repreni tud sod hac imprudent,
Me gare ve disec'h het feunteun ar guin-ardant.

C'houi laca an disenor en hostiliriou,
Bete dont da n'em ganna en quichen an treujou,
Mez eo clevet an eclat a sorti deus ho pen ;
Me zo mestr d'am guin-ardant, nan, no po quet a gren.

En despet d'am bolante e roan portion,
Pa c'houlennet guin-ardant da zevi o calon,
A laca var an douar ar ieot glas da ruia,
Ma ve an tan n'ho codel ne vouefac'h quet en laza.

Da genta ar guin-ardant a voa bet ivantet
Evit ober remejo deuz clenvet ar c'hezec ;
Lacat ra ru, an ardeur hac an hardiegez.
Tud terrupl voar ho memor, na n'o pe quet a vez ?

En em dennit d'an dansou ; duze var ar gommun
E ve tud a bep sort etat o c'hetal o fortun,
O vuzuri o guenon hac o clasq digare
Pa ve an dud o fansasal da dronc comz aneze.

Echu ar passipi, neuze veziut guelet
O vont d'an hostiliri, plac'h et evel goerset :
Quemeromp eur voutailad entrezomp da eva,
Pa gommanso an dansou ni ielo da guenta.

Hueillet ve ar falz profet deuz an hostiliri,
Da vont da drempa e anchen dirac ar grucifi.
Guir Batroned ar pardon ha bea zo moyen
Da c'honit induljansou ha da heuil sonerien.

Fiomp en autorite ha finissomp ar zon,
Contaplomp an aviel en imitation ;
Doctoret deuz an iliz, hanvet an ebestel,
O deuz lezet pep hini da roula he guentel.

Me ho ped, tadou ha mestrou, hac ive hostijen,
Quelennet o pugale hac o servijerien
Da gondui o reglen herve ar c'hatekiz,
An instructionou familier, *gloria in excelsis* !

Evit rei da entent breman presantamant,
Er bla c'houec'h ha tri ugent goude an trivac'h cant,
Eo composit ar recit-man gant eur speret dister,
Guinidig a Plouignau, na n'eo quet scrifanier.

CHANSON NEVEZ

Composit var sujet daou Den Yaouanc.

Mar plich guenec'h selaouet hac e cleofet cana
Eur son a zo composit a neve vit ar bla,
Zo gret da eur plac'h yaouanc deus a paros Ploubezr,
A chom ebars er c'hastel, var vordic ar rivier.

Hy eo ar c'haëra objet ameus bet remerquet
Bars en bordic Lannion etoues an oll merc'h et :
He fortun hac he fresañç, pa vent consideret,
Gant ar sperejou humen hy a ve admiret.

Me deu d'he c'homparagi ous al lore musclet ;
Vit rustoni an amzer hy a chom gaë bepret :
Ma mestres a zo jouas ebars en peb amzer,
Quen a dosta an termen deus a bardon Ploubezr.

Da dialben an avel zo deut eun orajen
Hac a captif ma mestres, ebars en pep tachen,
Dre ma teu rê da gredi a galon, a speret,
Ar pes n'em boa bet biskoas ma unant desiret.

Me zo evel eur *Phenix* o nijal dre an dour,
Accuset gant ma mestres, hep gallout n'em sicour,
Pe evel ar fleurdilz zo eur fleur estimet,
Mez dre ardeur an amzer a n'em gav prest guenvet.

Credet, eme ma mestres, eun amzer a m'oa bet,
Ebars ho compagnunez me oa contant meurbet,
Quen a deus da gredi a p'oa ar volonte
Da guemer possession demeus ma amitie.

Ha pa mije studiet var an *theologi*
Ha tremenet ma c'hlassio ha ma philosophi,

A vijen c'hoas incapabl da ellout explika
Oll talanchou ma mestres, p'an ho c'honsidera.

C'houi, emezy, den yaouanc, am laca calz souezet ;
Antren em c'hompagnunez hep beza bet pedet !
Ho mado hac ho talant a zo dister meurbet :
Me ho les en liberte, pa n'en d'oc'h d'am souhet.

Me a requet d'am mestres graçou en abondans,
Ha din eun talant guirion evit poursuiiv ma chans !
Me zo vel eur c'hriminel ous ar chaden staguët,
Hep cavet nep esperañç da veza delivret.

Me renq stigma ma roëjou er bord all d'ar rivier,
Ha sortial gant glac'har ermes deus a Ploubezr :
O c'hantren en Tonequedec me a vo consolet
Gant ma mestrezic *Fanchon* : alies e zon bet.

Brema me za da vonet da gavet bord ar mor
Vit passeal ma chagrin gant muioc'h a henor
Lec'h ma clevin ar *Syrén* er mor don o cana :
Honne a deu da charmi calon ar re drista.

Me ho ped, paysantet, pere zo er scolio,
Pa glevet ar chanson-ma, reparet ma c'homzo :
Me zo eur c'hoader yaouanc, n'en don quet studiet ;
Evit tremen ma amzer ameus he c'homposit.

Ar canouen zo rimet en bordic eun dourel
Savet var pevar pilier, exposet d'an avel,
Gant eun artisan yaouanc divalo a speret,
Evit rei lod anezi, goude, d'he vignonet.